

KÉNENNADUREZ EUN TAD

DHE VUGALE

I

Ma Bugaligo tostaet,
Eun neubet ama d'am e'hlevet,
M'ho kélenning, deuz ma guella,
Gant guiégez, hanter kant vla.

II

Ar maro sko dall, bep kamed,
Iaouank aliez, koz bépred,
Beb sort a so voar an douar,
Neubet a joa, kalz a e'hlac'har!

III

Abred kémérit plegiou mad,
Lezit an drouk, ha gret ar vad,
Klaskit hent baradoz Doué,
Ha kerset eûn enhan bemdé.

IV

Pa réer trein fall er iaouankiz,
Diez a vé dont var he giz,
Bévan rer vel ve komanzet,
M'hel lavar dhac'h, ma silaouet.

V

Disfiziet e'hanoc'h ho unan,
Vit kerzet eûn eo red kaout poan
Drouk a refet, vel evan dour,
Ma na deu Doué d'ho sikour.

VI

Kovésait, hardi bep tri miz,
Guelloc'h véfé soken bep miz,

Darn a raïo goab ac'hanoc'h,
C'houi vo bepret evurusoc'h.

VII

Na vankit kamed d'an ofern,
Ho labourio lézet agren,
D'ar goélio berz ha d'ar zulio,
Pe tenfet varnoc'h gualeurio.

VIII

Gret ho peden, var ho taoulin,
Gant karantez, noz ha vintin,
Euruz véfet en ho labour,
Mar galvet Doué d'ho sikour.

IX

Pellait diouz kompagnonez fall
Fiziet ket ré barz ar ré all,
Neubetoc'h enoc'h ho unan
An den koez, sioaz, ré vuan.

X

Kamed Béleïen diskriet,
Ho c'harakter sakr énoret,
Tud ezint ivé éveldomp,
Peurvuian guelloc'h evidomp.

XI

Ar Pab, an Eskibien, ivé
Komzet gant enor diouthé,
Gant Doué hi, a so karget,
D'hon c'has oll d'an évurusded.

XII

Néblec'h na ruiet deuz ho fé,
Pe c'houi, zur, ho 'po keuz goudé,
Dré oll, savet uhel ho pen,
Laret heb aon, oc'h kristénien,

XIII

Pa gléofet komzo dishonest,
Tavet neusé ha têche prest,
Et pel pel deuz ar rum tud sé
Pe deufet henvel diouthé.

XIV

Pa gléofet tud toui-Doué,
Mar c'heuz tam galloud varnhézé
Ho c'hastiet dré garanté,
Ma tilezfont an tech fall sé.

XV

Er marc'hajo, heb tromplerez,
Guerzet ha prênet vel tud rez,
Paouraât a rer, pa dromplaër,
Ha pa ver rez, pinvikaër.

XVI

Dioallet diouz ar vesventi,
Hennez eo rivouin bephini,
Guel eva dour pad ar vué,
Evit béan mézvier eun dé.

XVII

Diouz ar béorien bezit truez,
Mar gallet ho sikour bemdez
Dre labour, pe dré aluzen,
Tenfet gras Doué var ho pen.

VXIII

Ho servijerien a garfet,
En ho c'henver mad a vefet,
Na viret ket ho foan outhé,
Ho c'helennet, gant karanté.

XIX

Ma Bugale, dougit respet,
An eil vit égile bépret,

N'em unanet, e guirioné,
Ganec'h vezo bennoz Doué.

XX

Anez na vé met kasoni,
Fallagriez droug hag anvi
Var ho lec'h a deu malheurio,
Ho koler Doué, hon otro.

XXI

Kredi aran, o ma Doué,
E tioalfet ma Bugalé,
Vit ma kersfont var an hent mad,
Heb gallout biken hen kuitaad.

XXII

A greiz kalon, m'ho ped, Guerc'hez,
Sikouret, ma Bugale gez,
Anez d'ho kraz, nalfoint biken
Karet Doue, heuil he lezen.

XXIII

En peoc'h neusé me a varvo,
Pa neo ket ama ma guir vro,
Eun deiz ni n,ém gavo darré,
En joaño Baradoz-Doué.

Y. HERNOT.